

M'HO PEUZ EUR PHONO...

...e kavoc'h pladennoù (disques) brezonek, a re vras, e Kastel ag e leac'h all, en tiez ma vezit e c'hober ho prenañnoù. An Aoutrou Georges SELLERS, eur muziker bras brudet e Pariz, a zo e vuzikat ganentre ma kanaan.

Setu aman ar pladennoù brezonek am beuz kanet da ziveza :
Son ar Pinard, Perak e choman paotr yaouank, War bordig an dour, Gwir Vretoned, An teodou fall, Ar plac'h diez da gontanti.

Goulennit atao ar pladennoù Gramophone "**Mouez e vestr**". Arreze eo a re vella.

ROÏT DEOMP LABOUR



Savet ganth ar barz kastellad
Francis MOAL
(Alc'houeder Leon)

420

ROÏT DEOMP LABOUR

Son nevez savet ganth ar barz kastellat, Francis MOAL « Alc'houeder Leon ».

I

Selaouit, va mignoned,
Kana eur son nevez,
Deoc'h 'zan da lavaret,
Hirio, ar vrionez,
Tud koz, a yaouankizou.
Oh! Oh!
Selaouit mad va c'homzou.
Oh, oh va bro!

II

Pebez amzer glac'haruz
Varnomp zo erruet!
Ped paourkeaz malheüruz,
Bemdez, a vez gwelet!
Kalz tud a zo glac'haret.
Oh! Oh!
Tamm labour bet vez kavet.
Ho, oh, va bro!

III

Gwechall, an den a vicher,
Pa laboure bemdez,
Veze laouen a seder
E c'hounit e zervez.
Breman, en tiegeziou,
Oh! Oh!
Ne glever nemet klemmou.
Oh, oh, va bro!

IV

Ma kendalc'h c'hoaz eur pennad
Eun amzer ken kalet,
Ma n'heller ket labourad,
Ni a zo tud kollet.
Pa vo re a baourentez
Oh! Oh!
E rankor mont da laerez.
Oh, oh, va bro!

V

Ma ve kasset an estren
Peb hini barz e vro,
An traou, a c'heller kompren,
Iafe gwelloc'h en dro.
Gantho man a labouriou,
Oh! Oh!
Rankont ket paia taliou,
Oh, oh, va bro!

VI

O, Franz, hor mamm ken karet!
Ro deomp ta labour,
Hor c'halonnou zo rannet
Deuz buan d'hor sikour,
Sonj en amzer dremenet!
Oh! Oh!
Ni hor beuz da zifennet.
Oh, oh, vo bro!

VII

Pad ar brezel diveza
Ennomp peuz bet sonjet.
Aliez er penn kenta,
Ni a zo bet kasset.
Goude gounit ar brezel
Oh! Oh!
Ganth naoun e rankor mervel.
Oh, oh va bro!

VIII

Aoutrou Doue benniget,
Doue ar gristenien,
Ho pugale ken karet
A ra deoc'h eur beden:
Mirit an holl brezelliou
Oh! Oh!
A roït deomp labouriou.
Oh, oh va bro!

Reproduction interdite !

Francis MOAL.